

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù – Ronds et rondes simples

**Tri verdead**

Tri verdead yaouank, *o gué trañ la, trañ la dira*  
Tri verdead yaouank hag e kompagnoneazh,  
Nag e kompagnoneazh, *o gue*  
Nag e kompagnoneazh.

Gant an avel daolet,  
Gant an avel daolet deus kostez bro ar Saozen.

'Kichenik ur vilin,  
'Kichenik ur vilin, eno e voe ur fumeleenn.

Ha n'ac'h eus ket a soñj,  
Ha n'ac'h eus ket a soñj abaoe ur wech e Naoned.

E Naoned er marc'had,  
E Naoned er marc'had o choaz ur bizaoued.

Bizaoued alaouret,  
Bizaoued alaouret o parlant diouzh an eured.

Eureujomp-ni hon-daou,  
Eureujomp-ni hon-daou ha deomp da zalc'h ur menaj.

Menaj o "comme il faut",  
Menaj o "comme il faut", an neb a ray a gavo.

An 'ni na ray nentra,  
An 'ni na ray nentra, n'en dezo ket a vara.

Da reiñ d'e vignoned,  
Da reiñ d'e vignoned ur wech mat diouzh da'm gwelet.

Ha 'ni na ray nikun,  
Ha 'ni na ray nikun n'en dezo ket a vutun.

Ha butun da fumiñ,  
Ha butun da fumiñ, na chika da c'hlaourenniñ.

Ar c'hafe d'ar merc'hed,  
Ar c'hafe d'ar merc'hed hag ar c'hognak d'ar gwazed.

Ar merc'hed 'zo lipous,  
Ar merc'hed 'zo lipous hag ar gwazed 'zo c'hoantus.

Ha zoken betek re,  
Ha zoken betek re pa devez led ur banne.

Ur banne a c'hwec'h leal,  
Ur banne a c'hwec'h leal da gas Perin d'ar gear.

Chanté par Mon Galliou ( lilia – perroz )